



ROAZHON WAR RODIGOÙ A CHEÑCH BRAKED HAG A BIGN UHELOC'H !

Eus ar **14** betek ar **15** a viz **Mae** e vo dalc'het **Roazhon war rodigoù** evit an **29^{vet} gwech**

Aozet eo Roazhon war rodigoù gant Kelc'h Paul Bert gant sikour Kêr Roazhon. An digarez eo da reiñ enor d'ar roller e meur a vod e kreiz-kêr e-pad un dibenn-sizhun : redadegoù, baleadegoù, roller gwevn hag abadennoù ma c'hallo pep hini ober taolioù-esae, c'hoari ouzh ar re all, bezañ souezhet da-geñver un darvoud sport pobl ha digoust a vez kinniget bep bloaz.

Mont a ra **Roazhon war rodigoù** war-raok ha digor eo da vuioç'h a dud c'hoazh peogwir e vez degemeret marc'hou-houarn, pe e vefent doare kêr, hentoù pe hentoù treuz evit hor baleadenn nevez, **Ar Rodoù Dizalc'h**, d'ar **Sadorn 14 a viz Mae eus 18e00 da 21e00**, a zeu da vezañ, evit ur wech, ur bourmenadenn d'ober anaoudegezh gant lec'hioù dic'hortoz Roazhon !

Distro e vo ar **S'MI Roller**, ur redadeg evit ar blijadur ma 'z eus, hag a oa bet lañset e 2010. Etre mignoned, an-unan pe dre skipailhoù e c'haller redek enep ar c'hronometr d'ar **Sul 15 a viz Mae etre 9e00 ha 10e30**. Diouzhtu war-lerc'h e vo lezet plas d'ar familhoù evit ar **Rando'Pop**, anezhi abadenn diazez ar gouel hag a bed holl Roazhoniz da ruilhal gant plijadur e-pad 2 eur d'ar **Sul 15 a viz Mae etre 11e00 ha 13e00**.

D'ar **Sul 15 a viz Mae** e vo tro ar gevezerien gant ar **Maraton Broadel Master**, adalek 13e30, ha goude-se, da 16e00, ar **Maraton Etrebroadel Senior** hag a gont evit **Kib roller tizh ar bed**.

Dont a ray **Reper ar Jeneral de Gaulle** da vezañ un dachenn **street skating** peogwir e vo degemeret ar **FISE Expérience 2011**, un droiad Freestyle 100% ma vo roet digarez da amatourien ha tud a vicher war Roller/BMX da vont war ur park a 1 200 m². Evit ar re hardishañ e vo staliet ur « **big airbag** » war ar gêriadenn, anezh ankouaat ar **redadeg trotreziou kentañ**, d'ar **Sadorn 14 a viz Mae eus 15e00 da 17e00**, digor da skolioù kentañ derez ha da skolioù Roazhon Meurgêr.

Dalc'het e vo an **Night Session** adarre, d'ar **Sadorn 14 a viz Mae adalek 20e00**, gant : High Air Contest & Best Tricks war ar park, hag ur Roller Disco kement ha klozañ ar **Saturday Night Roller**.

Fellout a ra deomp delc'her an **dachenn riklañ** disaotr ha brudañ daou obererezh ekoedodour sevenet ganeomp e 2011 : bez' e vo **kannaded an diveskañ lastez** er gêriadenn ha digoret e vo a-ratozh-kaer, d'ar Sul 15 a viz Mae, ur park all, hini ar Boderezh en ur c'harter tro-kêr, d'an dud da zont davedomp en un doare ekologel !

Tapit krog en ho poteier-ruilh hag en ho marc'h-houarn ! Nemet ha gortoz a rafec'h ken ho po selaouet alioù fur hor c'hasourien el lec'hioù ma vo roet un tañva eus ar Roller hag eus ar BMX !

Peogwir emaoamp e Breizh he sevenadur pinvidik ne vo ket ankouaet ar sonerezh : klevet e vo ar Roller Brass Band (ar fañfar nemeti a ya war roller), ar Bagad Kadoudal eus Gwern-ar-Sec'h, hag ar c'henstrollad Stereophonk a zegaso ul liv elektro !

An darvoud-mañ, aozet en un doare nevesaet gant Kelc'h Paul Bert gant ur spered dezhañ e-unan, evit ar blijadur hag ar fest, a vo paeroniet gant Taïg Khris, ar gouron hollvrudet evit a sell ouzh ar sportoù riklañ, a vo ganeomp d'ar Sul 15 a viz Mae.

Piv en deus lavaret e oa lezet Roazhon war Rodigoù da vont dizalc'h e rod...

www.rennessurroulettes.com / www.facebook.com/rennessurroulettes